

---



# QUIMIAD A ROLLAND

## GAND E BRIED IZABEL.



1

Red eo e lavare guechal  
Rolland , pried tener Isabel ,  
Red eo men renk partial  
Evit mont dann Turki dar bresel ;  
Gouëla a rez dimen breman ,  
A caon a rez din var da veno ,  
Eun all abars nemeur aman  
A deui da zec'hi piz da zaelou.

2

N'eo quet possubl did e vanken ,  
Eun eur gouëla emen Isabel ,  
Did e vezin da virvilken ,  
A pa vez maro bepred fidel ;  
Ma zeufenn da ancounac'hat ,  
Ann ini emeuz kement caret ,  
Ra zeui dirag va daoulagad  
En speç da reproch din va fec'het.

Mar demezan var va devez  
Er banquet em hichenn azeet,  
Deud da gass ac'hanon dar bez  
A lavaret e vo men da bried ;  
Rolland a zo maro siouas,  
Isabel e deuz caon ag ankenn,  
N'eo quet echuet mad ar bloas  
Ma teuas eur Markis de goulenn.

E renq, e c'henet, e arc'hant,  
A zallas calon an intañvez ;  
Rei a raz e c'hounsantamant  
Ag assinet e oe an devez ;  
Ar guerent oll enn em assamblet,  
Ar banket a gomanças soudenn,  
Ne oant ket c'hoas peur azeet,  
Eunn Officer zo enn o c'hichenn.

Spontus bras a re e velet,  
Rag eguisse guisket enn ouarn,  
Ag evelse e oa goloët  
Quercouls e visach hag e zaouarn ;  
Ne greden ket sellet e faç,  
Couls goude e doa c'hoant de velet,  
Ag enn eb finval deuz e blaç  
Euz Isabel a zelle parfett.

6

Ar mab nevez kenn souezet  
Enn deuz lavaret en eur greña :  
« Tolet ô cask , men ô ped ;  
Ag azeet ganemp da leïna ; »  
E gask penn d'oa tolet  
O pebez orreur meurbet c'hoëro !  
Scrijal a rë tud ann heured  
O velet bisach eun denn maro.

7

Enn e za plom ar geanteriz  
Eus ar plac'h a zelle parfet ,  
« Sell , emezan , sell ouzin piz ,  
Meu eo Rolland , lazet er brezel ;  
Din-me guechall o poa prometet ,  
A pa zigouesse ganen mervel ,  
Bikenn e kemerjac'h eunn all  
A din e vijac'h chomet fidel.

8

Tud gentil , pa oann e buez ,  
Ouman a oa va dimezel ,  
D'euz ganeme breman d'ar bez ,  
Deud eo da heur a te renk mervel ; »  
Astenn a ra e zorn pounner ,  
Caër e deuz crial a deplori ,  
Gant ann douar e zint bed lonquet  
A c'hoas e c'hlefac'h oc'h irvourdi.

Ar baron a zo chomet mantret,  
Ag a lavaras kenn partial :  
« Ma renk ann oll intanvezet  
Hirio ann deiz caout eur seurt c'hoari,  
Meur a zenu maro a velfet  
O tont da ober chalivari. »

Isabel a zeu d'y bep bloas,  
Guisket er c'his mont da eureuji,  
O crial ato goassoc'h goas,  
Ar spec ne ziskroc morse outi,  
Ag abaoe denn n'enn deves credet  
Ober e zemeuranç er c'hastel.

